

## **YF\_0004\_Metig**

### **Galv**

Deuit da zañsal tud yaouank pa 'maom krog da ganañ  
Stokomp on treid d'an douar, ken a greno ar ger-mañ

Stokomp on treid d'an douar, hag ar ger-mañ a greno  
Hag ar zaout en o c'hreier marteze richano

### **Gavotenn**

Tud yaouank a Vreiz-Izel, didostit da glevet  
An istor eus va daelou ha va 'foaniou kalet

Me 'zo ur c'hloareg yaouank eus eskopti Kemper  
Ha 'n-eus choazet ur vestrez e-barz eskopti Treger

E bord ar mor on ganet e bro Sant Gwenole  
Ha biskoaz nemed glahar n'am-eus bet em buhez

Glac'har a wir garantez setu ma 'flanedenn  
Planedenn rust ha kalet da heuliañ penn da benn

Pa oan em bugaleaj ma mamm baour aliez  
A lavare din « Ma mab, kar ha ped ar Werhez »

« Ped anezi ma mabig, ped Gwerc'hez Rumengol  
Mar he 'fedez a wir galon ne di jamez da goll. »

Patronez ma mamm dener, Gwerc'hez vat Rumengol  
Pet gwech hoc'h eus c'hwi miret na d'an-me aet da goll

He 'fedet am-eus bepred, ha bremañ raok mervel  
Me ' gan he meuleudioù d'am breudeur Breizh Izel.

Pa gimiadis diouzh ma zud, 'vit mond pell eus ar gêr  
Evit mond war ar studi da skolaj Landreger.

Ne oan nemed pemzek bloaz, me a ouele doureg  
Rak evidon ne oa ket, siwazh, an eurusted !

O tostaat eus Landreger, me ' gavas ur plac'hig  
Koant evel un ael Doue, hec'h ano oa Metig.

Koant e oa, un ael Doue,

D'ar gouent e yae ivez, 'vel ma yaen d'ar studi  
He c'halon a oa mantret kement ha ma hini.

"Salud deoh, plac'hig yaouank, a lavaris dezhi  
Evel don oc'h ankeniet o kuitaat tud ho ti !"

Ho tornig flour em dornig lakit gand karantez  
Evit ma vimp eurusoc'h o ouelañ asamblez

Hag e vefomp eurusoc'h

Ar plac'hig a lavaras "O kloareg Gwenole  
Pedomp Doue alies an eil evit egile.

E joa koulz hag en anken, dalc'hit sonj da Vetig  
Eus a vremañ da viken ez eo ho mestrezig !"

O! Metig ma c'harantez, rozenn gaer Breizh Izel  
War ho mignon Gwenole taolit bremañ ur zell  
Ur zell digant ho lagad a raio eurusted  
Keit ha ma laosko Doue da vale dre ar bed

Erru e ker Landreger, erru e penn on hent  
Me a voe kaset d'ar skolaj ha Metig d'ar gouent

An disparti a oa kalet, c'hwero hag ankenius  
An eurusted er bed-mañ n'eo ket un dra badus !

Dre ma chomis er skolaj, skeudenn dous Metig kaez  
E-pad an noz dirazon a zeue alies

Noz deiz dirak ma lagad a deue alies

Neuze e peden Doue ha sent koz Breiz-Izel  
Evit ma vijem 'n on buhez laouen, eurus, santel.